

Ar Soudard Yaouank.

Pa oan bihan, bihan er gêr e ti va zad, pa oan bihan, bi-
 han er gêr e ti va zad, me a oa eur bugel a oa e-
 leuret mat, me a oa eur bugel a oa e leuret mat.

- 1 Pa oan bihan, bihan, er gêr e ti va zad
 me a oa eur bugel a oa e leuret mat
 (hag a oa savet mat)
- 2 Na pa oan deuit en oad da denna d'ar bilhed,
 me o'n em angaji en servij ar Flandred.
- 3 Pa oan 'n em angaget ha touchet ma arihant,
 Tro pad ma oant padet me oa soudard vailhant.
- 4 Tro pad ma oant padet me oa soudard vailhant,
 allaz! pa oant aet tout oa Kalz a c'henchamant.
- 5 Me o skiva lizer d'an mammig ha d'an zad,
 laret pala ma ramplasi ha douet d'an c'heri'hat.
- 6 Int o respont din-me war gornig ma lizer,
 Pa oan 'n em angaget e razen ma amzer.
- 7 Kabiten lutanant a goust war ar pleun fin,
 me e'r paour Kalz soudard 'goust war an douar yin.
- 8 Kabiten lutanant a zeb ar bara gverun
 me e'r paour Kalz soudard a zeb ar bara brenn.
- 9 Eun hostizez a gêr 'deven ma c'heleuret:
 Touch arihant ar Rome ha dezerti goude.
- 10 Pa belec'h a'h ez-te, paour Kalz soudard vailhant?
 Te a dlefe beza en pleun da rejimant.

- 11 Nag a deus-te ganin, ya, sur, war ar blaenenn,
Pountailhad win, balin, lod anei ac'h evi.
- 12 Me'tout eur soñj em fenn, 'c'h ober em dro a-grenn,
Kenta taol a stois, lai'his ma c'habiten.
- 13 Lai'het 'm ems ma c'habiten, petra 'm bo eint-se?
Tri denn er em c'halon ha tri all er em fenn!
- 14 Ma mouchever seiz glas 'vo laket d'am moucha,
Ma brasañ kamarad 'vo laket d'am zenna.
(eil gwech: an hini am lai'ho, ma c'hamarad a vo).
- 15 Holl dud yaouank ma bro, pa gesfet ma c'helo,
Keret ket d'am mamm baour penaos e vin maro.
- 16 Na leveret-hu dei 'vin aet d'an Itali
Na birriken jamel d'ar vro na retornin.
- 17 Ma mestrez a ouelo, ma mamm he c'houzoto....

Kanet gant Maria Franseza Kavan,
gwech Fransez Poallier, ganet e
Tredrez (4 genver 1882) hag o chom
e Lokerno - Tredrez.

Kleret e Pontbuden e miz here
1952.

An ton a 20 heñvel ouzh
Outanuel niv 42. hag all.

